

CHANSON NEVEZ AR MERHÉTAER

GROET GANT EUN DEN DEUS AR VICHER



Var ton : PÉBEUS QUÉLOU O VA DOUÉ

1^{er} Couplet.

Abaoué an devez miliguet ma chances dor mamm genta
Cavet eur hoantaden avalou neus mert poaniou er bedma
Martolod Escop dévézour peb hini neus e vicher
Mes neus quet crioh planéden vit hini ar Merhétaër.

2^e Couplet.

Mill drubuil mill displijadur renq bemdé da anduri
Né al quet poanès un instant ato e devez sourci
Evel ar had er raden né gousq morcé met anter
Pa vé ed an oll da gousquet et red hoas ar Merhétaër.

3^e Couplet.

Guel zéo béa destumet chadénet vel eur hy
Laquet da zivoal ar groagné en rouantilez an Turqy
Béza broudé vel eun azen samet vel eur marh glaouër
Argasset evel ar bleizi évit béza Merhétaër.

4^e Couplet.

Né deus nac énor na profit da honit barz er stad
Couscoudé a ben e hober eo red béza délicad
Cavet eun téod délibéret eur lagat lem a zéder
Pacientet eur genviéden évit béza Merhétaër.

5^e Couplet.

Red eo dézan vel an targas guelet an dévalijen
Béza sioal vel ar louarn méur vel eur zilien
Calonek vel eur lion crapad en guis deur guinver
Beza sean evel eun évryeiz évit béza guir Merhétaër.

6^e Couplet.

Béza joaus a zéder chérissa ar vogalé
Laret int patrom ho zad vit pliout dar gragué
Gout trémen brao deus ar ré goz silaou mad o solio caër
Péa dézo banahou lipach évit beza guir Merhétaër.

7^e Couplet.

cavet diouscouarn deus ar squiltra tevel voar pes neusclévet
Divoal mad da nem vrambaçal deus madeles ar merhet
Gout an tu da liva guévier nac a vé avéchou selair
Touet vé noz da gréis-té évit beza guir Merhétaër.

8^e Couplet.

Clevet propojou dipitus béza boutet en eojou
Insultet gant cos rampennet réi a récéou banahou
Anduri meurbet aliès ar glao an erh an tomder
Foltra e gorf ac e zillad stard éo béza Merhétaër.

9^e Couplet.

Miret an nor a vouigourat miret ar hi da harzal
Monet en ty dre ar prenest memeus dre ar chiminal
Crapat dreist ar moguério gant lampad dreist ar guicher
Balé sioal ével ar logot évit béza guir Merhétaër.

10^e Couplet.

Mestronia e zantiment derhel claz voar sonjou
Hoarzin ganteaon en e galon a destum pis e zaélou
Quémer ervé mai red dezan eur stum souret pé zéder
En nem divoazan da ruya vit beza guir Merhétaër.

11^e Couplet.

Mes ar starda deus ar vicher eo gonid ar merhet
Quizidikoh marhadouaes neus quet voar ar bed
Deus e divis e zantimant da bep hini renq hober
Leun demeus a sonjou évit beza guir Merhétaër.

12^e Couplet.

Vit dont aben deus eur seures renqer ober eur glaven
Vit gonit eun éféres gloalhi dei e horzaillen
Dar merhet a gar e nem benta réi eur hoef eun davanger
Laret amplot evit justoh evit beza guir Merhétaër.

13^e Couplet.

Goudai laquat e oll galloud fouetta e liardigou
Cavat fourgaç a néhamant cabouillad dre ar poullou
E vanq aliès e doliou et teu divragou dar guer
Pinous vel eur hoq diblumet stard eo beza Merhétaër.

14^e Couplet.

Heuzi ran pa gomprenan pegueument a drubuilou
Ar vizer ac ar boan speret a saufr ar paourkes pitou
Mes ar merhet zo qnententus a va halon quen tener
Ma zon en despet dam baro contraign da heul ar vicher.

CHANSON NEVEZ AN DOGAN CONTANT

Var an ton : D'HOBER AR BAL.

1^{er} Couplet.

Peguen diot eo ar voazet
Pere zo nos de trubuillet
O hévésad ô friéjou
Gant aon da zouguen ar herniou
Rac evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

2^e Couplet.

Eur vreg fidel zo peur vua
O scandalad pe o vouza
O taskagnat e hi ac e has
He mates petramant e goas
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

3^e Couplet.

Control dézi greg eun dogan
A zo dinoaz evel eun noan
Grayo he goas vel ma garo
Biquen coms rébèch na glévo
Ya evurussa den a valé
E zeo eun dogan voar ma fé.

4^e Couplet.

An oll a zo dézan mignon
Ac ar cheffou deus ar hanton
Banaho pes a gar da lonqa
Hep ma renq james o féa
Ya evurussa den a vale
E zeo an dogan voar ma fé.

5^e Couplet.

Da vouël Mikel ma nal quet péa
Na neus quet affer da nem jéna
Termen a nevo pez a garo
Pa ielfant gavet an outro
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

6^e Couplet.

Pa vo tom a brao an amzer
Na vezo ket dalhet er guer
Gant e vreg e vo aliet
Da bourmen evit e yéhet
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

7^e Couplet.

Gant ne erruo ket re abred
Laouen e vezo diguemeret.
E goan prest he a gavo
Ae e vélé tom avechou
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voa ma fé.

8^e Couplet.

Mar chanç de itron guilloudi
E nem guinig ar gompri
Ac an oll a goa ar buguel
Deus e dad pim patron hanvel
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

9^e Couplet.

Bugalé neus a beb sort
A ré éon a re dort
Re vrum re du hep cavet ar boan
Da ober ane é unan
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

10^e Couplet.

Oll tud e di ac e bried
Mar queret erédi zo pentet
Voar an ton vras a la pa pa
Ac e dieguès memeus tra
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

11^e Couplet.

Mar neus proces gant eure
Er justic ne gollo morcé
Atao hep mar en ho ar lanç
Pa yelo fantic er valanç,
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

12^e Couplet.

Diboanius ral e zeo ar stad
Neus nemert serri e zaoulagat
Mont er mes eur vech an amzer
Cana dre ma tosta dar guer
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

13^e Couplet.

Evit guir an oll doganet
Na nint ket quer coulz lodennet
Mes pa défai nemet an anter
O hondition zo hoas kaër
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.

14^e Couplet.

Evidom me tanfoultr biquen
Na eureujin eur feumeulen
Ma ne dou din dirac testo
E vin Cornice evel eur haro
Ya evurussa den a valé
E zeo an dogan voar ma fé.